


698 f



# GWERZ NEVEZ

## Var eun ton nevez

M'am be aoñalc'h a studi, a speret da rima,  
 Hac eur bluen em dorn, ha me prest da seriffa,  
 Me gomposfe ur reglen ervez va sentimant,  
 Var sujet au antretien entre daou zen yaouanc.

Mes qent avanç davantach me c'houlen asistanç  
 Eus ar sperejou caëra qent evit e c'hommanç,  
 Da rei lumier d'am speret pa meus occasion  
 Da ober eur son nevez ervez va intansion.

Pa lennàn ul leor bian zo en cayer va study,  
 Me a gav traou surprenabl hac a ra chagrin dio,  
 Pa lennàn va flaneden serifet gant va mestres,  
 Eus va brassa plijadour me meus tristiguez.

Pa voan ebars em jardin em oll gontantamant,  
 Me remercas ur fleuren a voa yiè ha brillant,  
 Qen brillant e voa e deillou hac an eol ardant,  
 Pa deu dezan para ebars ar firmamant.

— 2 —

Ounnes zo ur fleuren eus a velanconi,  
 Antreet deun em c'halon ha diez da effaci ;  
 Prinç an oll amouroustet, roue an duc yaouanc,  
 E e'bundu dre e sollou d'am renta languissant.

Qenta m'am boe an enor da velet va mestres,  
 E voa er porched goude an oferen bred ;  
 An eil guech ma e guelis assuri a ellàn  
 E voas ebars en ilis bet e communia.

O ober e fasq qenta e mesq ar vugale,  
 D'ar poent-ze e voa yaouanc ha me a voa ive ;  
 Aben ur pennad goude e his d'ar scol Gengamp  
 Hac hi er memes amzer a voa bars ur gouant.

Ma teuis da zilezel va education,  
 Evit dont d'e antreteni eus a greis va c'halon,  
 Evit dont da entreteni Rouanes ar fleuriou,  
 Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo ur fleuren eus a velanconi,  
 Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani,  
 Am eus dezi goenvi assuri a ellan,  
 E lacaï va c'halon var ar boent da rannan.

An eil de a vis cost me lacas em speret  
 Hac ive em fantasi mont da velet merc'het.  
 Mont da velet va mestres, Rouanez va c'halon,  
 Va oll desir er bed-mâ, va inclination.

## — 3 —

Debonjour dêc'h, va mestrez, an devez a hirie,  
 Gant eur galon gontant evel zo ganeme,  
 Gouscoude pa en em sonjân e voa din lavaret,  
 Ne ràn nemet coll amzer o tonet d'ho cuelet.

Sot oc'h sur va servicher, ma teuit da gredi  
 Ar goal deodou milliguet, zo o clasq hor separi ;  
 Ha pa vec'h din dispenet ker munut hag ar pell,  
 Se ne rafe ket din-me donet d'ho tilezel.

Pell so deus a amzer me am boa desiret  
 E teujac'h d'am saludi evel ma muia caret,  
 Ne larec'h guer ebet, ne rec'h qet a seblant,  
 M'em bea displijadur, mar e doe plac'h yaouanc.

Traitoures milliguet chenchit o proposiou  
 Rac defianç a rit din pa lavarit ho comzou,  
 Rac defianç a rit din pa glevân ho comzou,  
 Ebars cayer va studi demeus ho proposiou.

Eleal, va servicher, va c'hredi a ellet,  
 Rac me sinfe gant va goad ar pez a meus laret.  
 Dalc'het d'am darempredi a bed fidel din-me,  
 Biжен na vemp separat an eil ouz eguile.

Qen a denic Doue d'hor guervel evit ar vech diveza  
 Da vonet da renta cont da Grouer ar bed-mâ,  
 Qen a deuio ar maro da finissa hor bue,  
 Biжен na vemp separat an eil diouz eguile.

— 4 —

Me meus guelet va unan differanç diouzin,  
Mari, Mari, va mestres, eus ho tarempredi,  
Ho tud a zo puissant, o deus renq ha leve,  
Me uo meus qet a vadou, gout aoñalc'h a rit-se.

Ouspen da gementse zo emei, va servicher,  
Ar madou hag an arc'hant a eller da ober ;  
Un den a vez demezet enep e santimant,  
N'ell qet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

Qement so var an douar gant va Doue crouet,  
An oll aour, an oll arc'hant en ur pres destumet,  
Hac e vent roet dime, ne ven qet c'hoas contant,  
Ma n'em be qet ar boneur da bossedi va c'hoant,

Me a meus grêt ur boquet demeus a zivision.  
Evit rei d'am mestrezic passetans d'e c'halon,  
Hac a meus grêt anezân demeus a huanad  
A lacaio d'en erren ur ruban eus va goad

O tistrei eus ar pardon ha var lein ar mene,  
Un devez dreist ar re al hi a laras din me ;  
Ma na guerit chanch a gontre pellât diouzin  
Aa goall deodou milliguet a glasq hor separi.

Ounnez eo ar bromesse a poa hu dime gret  
Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet !  
C'hui a brometas dime hac ive dre ho le  
Na vijemp qet separer evit deus ho coste.

— 5 —

Varben un nebeut goude int bet dispartiet,  
 An effet eus ho comzou a so bet eprouvet ;  
 Neus netra var an douar mel assuri ervat  
 A sco un tol qen mortel evel ur goal deodat.

Pa voan ebars em guele nos gouel ar Rouane,  
 Me glêve un eün em jardin hac a gane yè :  
 Lavaret a rè facil an eunic dre e son :  
 E ma da vuia-caret en desolation.

Deus a mintiu pa savis, me scrifas ul lizer  
 Da gaç d'am muia caret dre dorn ur messager,  
 Da glêvet e santimant evit ar vech diveza,  
 Guell eo mervel buan eguet chom da languissa.

Pa erruas ar messager ebars ly ar vestrez,  
 E voe diguemeret mat evit e ziveza guech,  
 Qemer eure al lizer hag antren en e c'hambr  
 Ea scrifa din va c'honje neuze soudent vantant.

O setanç a c'houlennit, emei, va zervicher,  
 Assuret oc'h d'e havet, ia, en ber amzer ;  
 Ma visac'h d'am santimant, mad ec'h ellit credi  
 Na voa nemet ar maro capabl d'hon separi.

Mes na bremàn na goude, emei, se zo certen,  
 An amzer din d'ho caret ne aruo biquen,  
 Amzer déc'h d'am c'haout ne aruo biжен ;  
 Pa em bo bolontez, e voa déc'h va goulen.

— 6 —

Me zo ur minor yaouanc e poursui va studi,  
 Hac am bezo er bлоa-mа calz a velanconi,  
 Hac am bezo er bлоa-mа eur galon glac'haret  
 Estonet bras o velet na en em gariemp qet.

Pa deui an nevez-amzer, ar bleun bars er spern guen,  
 E vo calon an dud yaouanq yе ebars pep tachen,  
 Ar fleuriou er jardinou a vo tout rejouisset  
 Ha calon an dud yaouanq e pèvar c'horn ar bød.

Mes me savo eun dourel var lein ar mene,  
 Vis-a-vis da dy va mestres ha d'am hini ive,  
 Da vouela gant glac'har d'an amzer tremenet,  
 Da ober reflexion em planeden galet.

Pa voan-me deut ac'hane ur pennad eus e zy,  
 Ha me clèvet al lapousset er bot o fredoni ;  
 Ha me o chom d'bo zelaou hac ive compleasant,  
 Rac ar chanson a ganent a voa sur ravissant.

Cana a rent quer charmant, cana a rent quer y è,  
 Rejouissa a rent calon tout qement o c'hlève,  
 Ma commançjont lavaret dime ive dre o moes :  
 Petra dal dide, cloarec, qemer tristidigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mа gant da chanç,  
 Danve madou so certen ebars en abondanç,  
 Te so ebars er guér gant da vam ha da dad,  
 Ne c'heus nep nécessite a voued nac a zillad.

— 7 —

Ha me a zo e cana ha yiè va c'halon,  
 Ha ne meus er bed-man nep provision,  
 Finissa res hep retard, neuze en un instant  
 Ha rentet joaus bras calon un den yaouanc.

Guechal m'em boa un amzer a zezolation ;  
 Mes bremâ me so joaus, triomfant va c'halon,  
 Me a voar e gana bremâ certen, va mignonet,  
 Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet.

Var hen un nebeut goude int bet en em gavet  
 En ur plac a goste o daou, elec'h m'e dos lavaret,  
 Da renta an eil d'egnile ar pez a voa dleet,  
 Ha da derri ar bromesse a voa etreze grêt.

Debonjour déc'h, va mestrez emezan prontamant  
 Petra a zo a nevez en ho comportamant ?  
 Diveza ma ho cuelis e voa brillant ho sellou,  
 Ha bremâ n'ho remercàn nemet o scuill daëlou.

Hac hi ho respont din, ja, eu ur guir bêr :  
 C'hui so qiriec d'am glac'har, emei, va servicher ;  
 Retornet c'hoas ur vech d'am c'haout, me so contant  
 Da resina va buez evit cavet va c'hoant.

C'houi certen, plac'h yaouanc, c'houi certen a zo bet  
 Ar guenta gouarneres imprimet em speret ;  
 Mes daelou va daoulagad o vouela nos ha de,  
 O deus va oblijet da chench a volonté.

**(Propriété de l'Imprimeur).**